

TOG JANI

MARIANNA : mamm Jani
JANI
AR BILLAOUEREZ
SOAZIG, merh ar billaouerez.

DIVIZ I

MARIANNA, JANI

JANI

Mamm ! arru eo Soazig ! klask a rin pillou da rei dezi ?

MARIANNA

Ya, gand e taolfet pe ne rofet ket dezi traou mad e-leh traou fall, 'vel poa greet ar wech diweza, pa'z 'poa taolet er pillou loerou nevez ho c'hoar. Me ya da zerri kaol bremañ... Goulenn a refet diou gudenn hloan 'vid ar pillou...

JANI

Ya, mamm !

MARIANNA

Gortozit 'ta, ma lavarinn deoh !... Diou gudenn hloan du ha teir gudenn hloan ruz.

JANI

(O tibab pillou en eur houfr).

Ya, mamm, diou gudenn hloan ruz...

MARIANNA

N'eo ket ruz, du !

JANI

Ya, mamm, teir gudenn hloan du...

MARIANNA

N'eo ket teir, diou am-eus lavaret deoh !

JANI

Ya, mamm, diou gudenn hloan ruz ha teir gudenn hloan du.

MARIANNA

O ! gwasad bugel eo houmañ ! N'on ket 'vid bounta seurt ebed en he fenn... Selaouit, ha mar ne zalhit ket soñj ... Gweled a rit ar skubellenn ?

JANI

(War an ton gouela).

Ya, mamm !

MARIANNA

Goulenn a refet 'vid ar pillou diou gudenn hloan du ha teir gudenn hloan ruz. Lavarit war ma lerh !

JANI

Diou gudenn hloan du ha teir gudenn hloan ruz.

MARIANNA

'Vel-se ! Ha bremañ, diwallit ne veh ket fur pe me welo ! Ma biz bihan a gonto din an doareou...

DIVIZ II

JANI

(Heh-unan)

Sell nag a billou 'm eus kavet ! Ar re-ze 'dalv ouspenn diou gudenn hloan... gloan ...gloan ruz ? Ma Doue ! ankouaet em-eus ! A ! nann ! teir gudenn hloan du eo, ha diou hini ruz ! Ya, mez ar pillou a dalv kalz ouspenn. Ar re-ze 'zo pillou mad, ha re gaer ! Daoust petra a houlfen c'hoaz ? Nadoziou ? Mamm he-deus re nevez ! Spillou, klochedou, ereou botou ? Ze n'eo ket tra-walh ! Sell ! ma houlfen eun tog ! Hounnez a werz tokou, hag an oll verhed bihan all o-deus tokou, nemedon. Fañchon traoñ ar bourk, he mamm 'devoa prenet unan fleuriet kaer dezi disadorn ; Nastazi Chigodenn 'zo greet unan dezi gand he c'hoar... N'eus nemedon ken en boned. N'ouzon ket perag n'houl ket mamm eh afen en tog. An deiz all he-devoa roet eur flumm din (ya, ken am-eus debron abaoe !) abalamour 'm-oa goulet diganti prena eun tog din... *(Chom a ra da zoñjal).*

N'eus forz ; me 'ya da rei ma boned d'ar billaouerez, ha marteze neuze 'mo eun tog gand mamm ! *(Mond a ra er-mêz da gerhad he boned hag e stlap anezañ er pillou).*

Bremañ 'welin ket anezañ ken bepred, an dra treset fall-ze ! Aze, 'mesk ar billou, 'vo brao a-walh 'barz troad eur goz louet, 'vid na vo ket gwelet...

DIVIZ II

SOAZIG - JANI

SOAZIG

Chekon, Jani, c'hwi 'zo o klask pillou din, merh vad ?

JANI

Ya ! Set' pesort bern am-eus kavet ! Ar re-ze 'a dalv kalz a arhant, n'eo ket 'ta, Soazig ?

SOAZIG

Kalz a arhant, merhig paour ? Ne werzin ket aneze deg kwennege !... Diou gudenn hloan a roin dit evid se.

JANI

Ma ! me 'houlo digand da vamm ; hounnez a roio muioh din.

SOAZIG

Mamm 'zo eet e kêr da brena tokou, ha n'arruo ket amañ hirie !...

JANI

Tokou a zo ganit ivez ?

SOAZIG

Ya ; eun tog 'teus c'hoant ? Sell amañ ar re a chom ganin !

JANI

O ! ar re-ze 'zo brao ! Galloud a ran lakaad unan war ma fenn da weled ?

SOAZIG

Ya, ha daou ivez, mar kerez !

JANI

... Prena, avad, n'hallan ket, pa n'ema ket mamm er gêr...

SOAZIG

Bepred e hellez lakaad aneze, 'r pez a gari.

JANI

(Oh êsa tri pe bevar dog dioustu-kaer).

O ! hemañ vije brao din, hag hemañ all, hag hemañ 'ta ! Pegement eo tokou evel-henn ?

SOAZIG

O ! kalz a arhant, merh vihan !

JANI

Lar din bepred !

SOAZIG

N'eus ket pillou a-walh er vilajenn da brena eun tog evel-se ! hennez eo an hini kaerra ! Mond a ra koant dit, avad ! Perag ne lak ket da vamm ahanout en tog ?

JANI

N'ouzon ket, mez me 'zoñj eo prest d'ober.

SOAZIG

Kas an tog-se ganit neuze !

JANI

Ya, mez bez' 'mo tra-walh a billou da baea anezañ ? Gortoz !... *(Mond a ra da gerhad traou er-mêz).*
Sell, hemañ n'eo ket mad !

SOAZIG

Petra eo ?

JANI

Eur goz vroz da vamm.

SOAZIG

(O selled outi).

Eo, mad sur ! *(A-gostez)*. Eur vroz koulz ha nevez !

JANI

Tra-walh az-teus ?

SOAZIG

Mar 'tije bet c'hoaz eun tamm koz hiviz bennag dre aze da lakaad gand ar goz vroz-mañ ?

JANI

Eo, ma hoar eo toull he re kazi oll... Mad eo houmañ ?

SOAZIG

Ya da ! *(A-gostez)*. N'eo ket ar falla he-deus dibabet !

JANI

Tra-walh 'teus bremañ !

SOAZIG

Keid ma'h out, m'az-tije bet c'hoaz eur bragou difoñs bennag !

JANI

(O tridal).

Just, ma breur Fañch 'nevoa difoñset ar hi Azor e hini dezañ disul gand e zent ? N'eo ket mad hennez ?

SOAZIG

Eo da ! Me ne zellan ket ken tost-se ! Ma feiz, poent e oa dezañ dond d'ar pillou ! Tamm koz koef brein ebed n'az-teus ket ?

JANI

N'eus ket tra-walh a draou c'hoaz ?

SOAZIG

An tog a zo nevez, hag an traou-mañ a zo traou koz toud, n'ouzout ket se ? Kalz a draou koz a ya da dalvezoud unan nevez, ha, dreist-oll, da dalvezoud eun tog 'vel hemañ !

JANI

Koef braz ma hoar Katell a zo aze hag hen roget. N'eo ket brein, avad, mez marteze 'vo mad, memestra !

SOAZIG

(O kemer ar hoef).

Ya, ya, mad sur ! N'eo ket red dezañ beza brein-pud... Sell, bremañ eo paeet da dog ! Kenavo ar wech all, ha chañs dit gantañ !

DIVIZ IV

JANI

(Heh-unan, pignet war eur skaon dirag ar melezour).

O ! hemañ 'zo koant ! Hemañ 'zo koant ! Pesort tu eo ar brava ? An tu-mañ ! Nann, an tu-ze ! Ha bremañ, pa'h in d'an overenn disul, an dud a zello ouzin ivez hag a lavaro din, 'vel da Fañchon Traoñ-ar-bourk : « Chekon ! Jani, c'hwi 'zo koant gand ho tog nevez ! Dalit eur gwenneg da gaoud ho lod !... »

DIVIZ V

MARIANNA - JANI

MARIANNA

(O tond en ti).

Petra ? Penaoz ? Piou ar strakell-mañ gand he zog ruz ?

Fañchon Traoñ-ar-bourk eo ? Ha peleh eo eet Jani ?

(Jani a zo distroet ha sachet he zog 'dreg he hein).

Panaoz, kanfantenn¹, c'hwi eo a zo aze ?

(Kregi a ra breh Jani).

Euz a behel 'peus bet an tog-se ? Lavarit din !...

JANI

Ar... ar... bi... billaou... billaou...

MARIANNA

A ! ya ! Ar billaouerez he-deus roet anezañ deoh ?

JANI

Ya... Ya... Ya !

MARIANNA

Hag ho-peus roet petra evitañ ? Lavarit din !

JANI

Pi... pi... pill... pillou !

MARIANNA

A ! ma fillou 'peus roet 'vid an tog ? Ha ma gloan ? Pelah ema ma gloan ? Komz a refet ?

¹ Kanfantenn : kanfartenn.

JANI

(O ouela doureg).
Hi ! hi ! hi ! hi !

DIVIZ VI

AR MEMEZ RE - AR BILLAOUEREZ

AR BILLAOUEREZ

(gand he sah e krap he skoaz).

Penaoz 'ta, Marianna, ema kont gand an traou-mañ oll ?... Me 'zo o paouez kaoud eur boned gwenn nevez-flamm e-touez ma fillou, hag ar havr vihan euz du-mañ ne lavarfe ket din euz a beleh 'deus bet anezañ !... Neuze 'm-eus kavet c'hoaz eur bragou koulz ha nevez, nemed zo bet krog eur hi bennag er foñs anezañ ; kavet em-eus eur hoef a dalv bepred pemp lur warn-ugent daoust ma'z eo roget eun tamm ; eun hiviz vad, eur vroz ha n'eo ket uz.

Eun inosant bennag, a-dra-zur, 'nevo lakaet an traou-mañ er pillou ?

MARIANNA

(Goude eur zell oute).

Setu amañ *(o tiskouez Jani)*, an hini 'deus greet an taol kaer-ze !

AR BILLAOUEREZ

An inosant paour !

MARIANNA

Inosant ? N'eo ket, foeltr gar dezi ! Houmañ a ouie mad petra ree ! Ya, n'eo ket heb gouzoud dezi !...O ! 'Velkent ha goude !... *(o selled ouz an traou)*. He boned ? He boned nevez !... O ! mar gallan beza krog en eur vaz ! Ha bragou he breur ! ... Santez ! Ha koef he c'hoar ! Itron Varia ! Eur hoef a zeg skoed d'ar pillou !... Bremañ-zouden me 'ya d'ho teski !... Beteg ma broz !... Hag hiviz Katell !... Gortozit ! *(Kemer a ra eur vaz ha lakaad lostenn ar fouet en avel)*.

JANI

Aiou ! aiou ! aiou ! Mammig kêz, 'rin ket ken ! 0 ! aiou ! 'rin ket ken !

MARIANNA

(O feusad).

Eun tog ho-po ? A ya ! eun tog ho-po ? Me 'zistago sorhenn... an tokou... diouzoh !... Lakaad er pillou... 'vid eun tog... ma broz... merinoz... hag hiviz he c'hoar...hag he boned... 'vid eun tog... a bemp... kweneg !...

JANI

Aiou 'ta ! aiou ! mamm gêz ! 'Rin ket ken ! rin ket ken ! Aiou !...

(Pa ziskrog he mamm, Jani a deh 'n eur floura traoñ he hein gand he daou zorn).

AR BILLAOUEREZ

Memestra, Marianna, garo oh ouz ar bugel-ze ! 'Vid kelou eun tog ! Ha peogwir eo kavet ho traou ?

MARIANNA

Ya, ya, kavet int, ha bennoz Doue d'an dud onest ! Mez amañ ne vo ket a dokoioù, keid ma vin beo ! Houmañ ne vo ket dimezell ! 'Vel he mamm, hi a dougo ar boned hag ar hoof, hag a zesko labourad ha lakaad a-gostez ardou kêr. Ma roan troad hirie dezi da gemer eun tog, warhoaz e ranko kaoud eur robenn ; an deiz war-lerh, eur mimi, ha goude eur manegou... Ha me 'oar ! Ar wech eet he fenn en ficherez, piou a deui a-benn anezi ? He boned a viro, pan eo me a zo mestr ! Lavaret e vez eo kerroh ar boned ? Mamm a oa paourroh evidon, ha koulskoude e talhas din bepred bonedou gwenn ! Kerroh, a lavaran-me ivez ! Ya da, ar mammou sod a gas distresa o bugale ! Ma ! ma hini ne vo ket distreset !

AR BILLAOUEREZ

(c'hwero).

Ma rafe an oll vammou kemend-all, n'afe ket kaer koñvers an tokou en-dro !

MARIANNA

N'ouzoh ket petra a lavarit ! Koñvers an tokou ? Euz a beleh e teu an tokou-ze ? Euz kostez Pariz ? Peleh eh a arhant ar mammou a bren aneze d'o bugale ? Da gostez Pariz, da larda tud ha n'anavezom ket, ha n'int dim na kar na par ! Komzit din euz ar bonedou ! Ar re-ze 'zo greet gand merhed euz or bro, ha pa roan arhant dezo evid unan e ouian eh a ma gwenneien da rei bara da dud hag a zo kerent, amezeien din, da vihanha. Bretoned evel don. Ma arhant-me a chom 'barz ar vro, hag ar vro 'vez gwelloc'h dioutañ, hag arhant an tokou a ya da Bariz da lakaad ober goap ahanom !

AR BILLAOUEREZ

N'em-oa ket biskoaz soñjet en ze !

MARIANNA

Ma ! dalhit soñj euz ma hentel ! *(da Jani)*. Ha c'hwi ivez, plahig !... Alo, lavarit din ha c'hwi a zalho soñj ?

JANI

Ya, mamm gêz !

MARIANNA

Alo, lakait ho poned !...
Roit eur pok din bremañ !

(Lakaad a ra he boned ha rei eur pok d'he mamm).
Ar ridoch a gouez.